

Dernière & bonne édition. 8 Juillet 1869. p. 89.

Sur la même édition, dans ce Cahier, page 17.

CHANSON NEVEZ

Var sujet ur Filouter en deus tromplet e Hostis.

Var un ton nevez.

M^e bo suppli, oll tud yaouanc, da zont da glêvet
Ur son meurbet divertissant a nevez compost,
A zo grêt da un den yaouanc, ur filouter fin,
Mar eantet, ar farç plesant a rai deoc'h c'hoarzin.

Arabat eo, compagnuez, ober dioutan :
Bete re a filouterien so dre ar vro-mâo;
Nemet hepken avertissa an oll hostisieu
Da ziouall na zenint da loja ar filouterien.

An den-mâ a oa brao guisqet, un den a fêcon,
Me sonch dîn e voa guinidic demeus a Leon :
Squis e voa er guær, re vaguet, meur a hoi so,
M'en deus lajet en e speret mont da redec bro.

E Montroulez hac e Guengamp, e Treguer eo bet,
E Sant-Malo, hac e Dinan, hac e Sant-Brieuc ;
Partout oa o clasq e fortun, o poursu e chanç,
Arc'hant en doa casset gantân bars en abondanc.